

AN NENVOU

It is nothing true but Heaven.

Thomas MOORE.

N'euz netra wir 'med an Nenvou

Toma MEUR.

Ar bed a zo eur skeudenn dremenuz
Hag eun draonien a enkrezoù ;
Mousc'hoarz ar joa, daër an anken klemmuz
'Liez a zo arveziou touelluz,
N'euz netra wir 'med an Nenvou !
Faoz eo ive ar c'hloar hag he brazder,
Faoz ec'h eo an holl enoriou ;
Karantez, spi, braventez ha kaërder
A zo bleuniou a falc'h an Ankou ter,
N'euz netra gaër 'med an Nenvou !
Ni zo er bed evel merdaï li,
Horjellet gand ar gwagennou,
En-dro d'eomp ar strifou o virvi,
Hag an dud fall, dre-holl, oc'h argadi :
N'euz netra sioul 'med an Nenvou !
C'houero ec'h eo ar vuhez a renomp,
Mesket ha treuzet a zaërou,
C'houero ec'h eo ar madou 'c'houlennomp,
C'houero ive an eurvad a glaskomp ;
N'euz netra zous 'med an Nenvou !
Hervez an dud kalz a draou a zo mad
Evit pellaat an ankeniou ;
Mez evid-oun n' ez euz 'med Jaou eur-vad :
Harpa ma bro e-kreiz tan an argad,
Ha lakât ma spi en Nenvou !!

(La Croix de l'Estay. du N. 7 Nov. 97.)

JAFFRENOU.